

154

Magerez an Drezne'.

(f° 156 verso)

Ma me me mouez a talent speret evid ober
 Me a skrivfe eur c'himiad kent partial dar ger
 Me zo bed ouec'h miz varnugent he kastel magerez
 En ti ar c'hont an drezne ag e ti ar c'homtess.

Ag a meus maget dezgo diou dimezel iasouank
 E tonet d'o dilezel me a meus kalz nec'hamant.

Me a meus pourmenet gato dre saliou dre cambjou
 Bed e zon gato ive en illis ar gatriednal
 (vellet an escop nevez | Kenta ma deuas e Kastel
 da ober e hantrie.

Bed e zon gato ive sellet deus an eurenjou
 Sellet dioc'h an tan a joo nag an artifiçou
 Pini zo gred en honor d'an escop a Leon
 An deveus kalz a virit vertus en pel fesson

Bed e zon gato ive nag e bordic ar mor
 Sellet o deuz ar verdaidi e treuzi ar ganol
 Sellet deus ar verdaidi o vond da vizina
 Da Kichen chapel Kallod eur plaç en devota.

Bed e zon gato ive en alle ar gernevez
 Ag er maner Kilaodi demeuranç var ar meaz
 Bed e zon gato ive en alle ar Gernevez
 e vellet ober rem var ar gardécotez.

Bed e zon gato ive el leuriou ar vererien
 E sellet tourn an ed

A hane me teuas e Kastel ag evit coanvi ^{hiverner}
 Da hedat ar mis maë evid ma kimiadis
 Dioc'h dimezelet an dresne dioc'h dimezel Kilaodi
 Dioc'h o zad ag o mam a kement zo en ti.

(f° 157 verso)

Mond a ran da Kimiada dioc'h an dimezelet
 Goude ze e rin ive dioc'h an domistiket
 Adieu eta Ambroizik, c'houi eo ar mab enan
 A doucho an daou fars al leve
 A jujo ar re al pa savo difficulte.

Adieu ta moucheu Roussel, adieu ta la pierre
 Adieu ta Fantik Cloarec hag ar paot jardiner.
 Me a ia breman d'ar ger da Kaout va bugale
 Breman eus c'houec'h mis varmugent e lezis a neze.

Brema e zeuz c'houec'h mis varmugent e sortis deuz va zi.
 Me a moa eur bugel daou vlas a voële dourek din.
 Breman e vezin kousolet, pa em goëlin e nem rentet
 — Debonjour deoc'h, ^{c'houi} or mam pel e oc'h bed dianket.

Ni a ia breman do reço gant pel laouenedigez
 Prometit deomp or mam non delesfet jamais
 Me a promet deoc'h va bugaligoù no delessin jamerz
 Keit a ma plijo gant Doue va lessel en buhez.

Tavid va bugaligoù na zamantit ket din,
 Kar o mam a zo tener ag a deu da vantri
 Me a vel tourioù Kastel deus a zor va zi
 A zigasso da chonch dime deus va dimezelet.

(f° 158 verso)

Deus dimezelet an dresne, deus dimezelet K'laodi
 Deus o zad a deus o mam a kement zo en ti

Er ger deus a Vontroùez ^{ag eus} Goub a sant Malani
 Enon e man o kerent nessa c'houi a ielo aliez di.
 Neuze mo koëlo enon ma vezan e buhez
 E pourmen gant an noblañz var ar pave nevez.

3

[rien aux 156, 157 et 158 rectos.]